

AN OGROU DILEZET

En eur barouz a Vreiz-Izel
An ogrou hep son a chom pell;
Koulskoude kaer 'oa hen klevet,
Sul ha 'gouel, en oferen-bred :
En oferen, er gousperou
E kane drant mouez an ogrou !

Evel telen eur barz tizet,
An ogrou a zo dilezet
Ha breman outan ne zell den,
Evel pa vefe diberc'hen;
Teodou milliget a lavar :
— « Pell e chomo choaz dilavar » —

Pa zone, 'vit eur vadeiant,
An « Te Deum » gant e vouez koant,
Ar paeron hag ar vaeronez
O dije kalz a levenez;
Hag an tad, laouen e galon,
A bede 'n eur zelaou e zon.

Devez kaer pask ar vugale,
Ar c'han, evel kan an aele,
A zave 'trezek an Nenvou,
Mesket gant mouez flour an ogrou,
Evit kas bete tron Jezus
Meuleudicu karantezus.

De eun eured, en oferen,
Mouez an ogrou 'oa eur beden
'Vit ma renje 'n unvaniez
'Tre 'n daou bried 'n o ziagez,
Ha goude hir-vuhe zantel
Mont dinc'h d'ar gloar eternal.

Ma kane 'n ogrou joa ar bed,
Alies e vouez he deus bet
Roët he daerou a c'hilac'har
D'ar re 'zo dindan an douar,
Ha, pa zone 'r c'hleier ar glaz,
'N ogrou gante a ouele c'hoaz.

Brao 'oa an ofiz hanter-noz,
Pa gleved ar c'hantikou koz;
An holl vugale a gane
Hag o moueziou a dregerne,

Kensoniet gant an ogrou kaer,
Da ganan Nouël d'hon Zalver.

Da Bask, ar c'hleier, an ogrou
A rae dudi d'ar c'halonou,
Pa ganent war eun dro gant joa :
« Alleluia ! Alleluia ! »

'N ogrou chom mud 'n traou an iliz
Ha disteroc'h eo an ofiz.

'N eur gêr vihan, am eus klevet,
An ogrou 'oa pell zo tavet..
An ograouer, lommig ha lomm,
'N deus lonket ar c'horzennou plomm :
Gwerzet en deus n'oun pet tuelen,
Evit gwalc'hi e c'hourlanchen.

Ezet eo kavet eur c'houezer...
N'eo ket rust diski ar vicher,
Met etre Gwened ha Pempoull
An ograouerien a zo boull,
Ha, 'vit paea seurt sonerien,
Ne gever ket a weneien.

Eur vez vras eo, ma c'henvroiz,
Lezel eun ogrou 'n hoc'h iliz,
A-herve ma lavar an holl,
Da beur-louedi ha da beur-goll,
Pa ne glasket ive er vro
Unan evit hen kas en-dro.

Ma mignoned, dougomp kanvo,
Laromp d'an ogrou kenavo,
Rak kaset eo, siouaz ! ar vrud
'Chomo peil an ogrou paour mud...
An amzer warnan 'deus taolet
Eur gwisk poultren trist da welet !

D'an ograouer

Ograouer, kemer da delen,
Kan, gant ar voualc'h beg-melen
Hag evnedigou koant ar roz,
Kanaouennou ar Baradoz,
Rak den n'en deus mui ar galon
Da lakat an ogrou da zon.

Laouennanig ar Roz.